

# Votadek 1928 en Taol-Montroulez



Ton a gerfot :

Kaer a I<sub>7</sub>, pe eun all.

- |   |   |  |
|---|---|--|
| <p>1<br/>Daoust ha petra 'zo a neve<br/>En Taol-Montroulez adare ?<br/>Pa glever met ar memeuz son<br/>Wit kaout eun depute dispar !</p>                        | <p>12<br/>Disprizet ha kazet dre oll !<br/>Na c'houlen ked anzae eo koll ?<br/>Ken a n'eo gwelet c'hoaz aman,<br/>Ped <i>kaezik</i> a voto gantan ?</p>                   | <p>23<br/>Dek vloa tri-ugent, pe war dro,<br/>Kabiten retretet pell-zo,<br/>Ma vefe depute varc'hoaz.<br/>Eo barek d'ober <i>kaeroc'h</i> c'hoaz ?!</p>                    |
| <p>2<br/>Paotred diskurpul ha divez,<br/>Gwelit, deuz kredet rei ho mouez,<br/>Wit kaout eun depute dispar !<br/>Da vreur Cloarec, paotr brao Col-<br/>mar.</p> | <p>13<br/>Rag al Louarn koz a oar mad<br/>A vo harpet <i>aman</i> dalc'hammad<br/>Gant eur bern lakijen d'he vreur,<br/>Ar sort na weler ked nemeur !</p>                 | <p>24<br/>Pa na glask met an enoriou,<br/>Ra forz wit kreski trùajou ?<br/>Gant na yêlo mann deuz he yalc'h<br/>Bec'h deñt-ta ! pa vo war he walc'h.</p>                   |
| <p>3<br/>Petra fell da dud ken iskiz.<br/>Met digas ar bed war he c'hiz ?<br/>Goasoc'h kalz, ha muioc'h izel,<br/>Evit n'en d'oa 'raog ar brezel !</p>          | <p>14<br/>Ya ! goud a oar 'zo bernio tud<br/>Bed primet evel loenet mud,<br/>Pere gantan zur a voto,<br/>Evit netâd ho rubano !</p>                                       | <p>25<br/>Gwelit, n'eo ked vit mad ar Vro,<br/>Eo e klask n'em vouta bep tro :<br/>Met evit kaout krog er vaz-yod,<br/>Da rei da lipad d'an dud sod !</p>                  |
| <p>4<br/>Kredabl 'zo chomet traou dindan<br/>Benn kemer kement-all a boan<br/>Da henvel, en despet d'an holl,<br/>An hini 'rai dè mont da goll.</p>             | <p>15<br/>Laret 'neuz dè 'valeche zur,<br/>Vel he vreur pa vo krog er stur :<br/>Rubano-ta 'vo c'hoaz ha vern !<br/>Lorc'h ha brasoni leñz ar c'hern !!</p>               | <p>26<br/>Pinvidik-môr : met den kazuz,<br/>Ma vije bed madelezuz.<br/>E n'ije komzet gant furnez<br/>Muioc'h a dù gant ar paour kaez.</p>                                 |
| <p>5<br/>Ha goude goud mad kement-man<br/>E pokont memeuz tra d'ezan :<br/>Neuz forz piou ? na pegen dister,<br/>Gant na raïo met ho affer ?</p>                | <p>16<br/>Hag evel-se, dre dud lorc'huz,<br/>Vo c'hoariet an taol en kuz ;<br/>Rar ar re vunud a yêlo<br/>War lerc'h d'hô heul, vel kramaillo !</p>                       | <p>27<br/>Met tangnouz ha kalet 'n he benn,<br/>E chom vel pa oa kabiten ;<br/>Ma lavar paotret an Arvor<br/>Eo aed he <i>voudsol</i> gand ar mor !</p>                    |
| <p>6<br/>Pa neuz ked tostoc'h d'ho c'halon<br/>Wit had-sevel hor pemp kanton,<br/>Leuskomp hint da vont er skoasel,<br/>D'ober dizmeganz Breiz-Izel !</p>       | <p>17<br/>Ha re zur da <i>dremen</i> ...a biou (!)<br/>E kemer de c'heul neuz forz piou ?<br/>Met ar gwalla deuz ar vanden<br/>Eo Gugus Jourand de <i>Tremen</i> !</p>    | <p>28<br/>Eru ken koz na delaer mann,<br/>Paz memeuz da vaer en Plouyan ?<br/>Lêc'h ne m'an met dre aluzen !...<br/>Klevit gant he gonsellerien ?</p>                      |
| <p>7<br/>Met d'hom zro, tud sklaerijennet<br/>Sevomp huelloc'h hor speret.<br/>Dreist pennou al lapouset tall<br/>Hag hastomp buhan klask eun all :</p>         | <p>18<br/>Pa ve gwelet gant mæer Plourin<br/>Renker dirolla da c'hoarzin (!)<br/>Neuz ked evelte gaou vaer all<br/>Gwestl da laket an traou en brall !?</p>               | <p>29<br/>N'eo bet met teir mouez wit beza.<br/>Henry Guy 'oa maer da genta ;<br/>Met a leuskaez he blas gantan,<br/>Pa n'eo kement a c'goant d'ezan ?</p>                 |
| <p>8<br/>N'eo ked gant diskouriou pentet,<br/>Na kazêtennou drouk-livet.<br/>Vo tromplet ken ar boblou kaez ?<br/>Ar C'Hoarec a renk mont er maez !</p>         | <p>19 [vad (!?)<br/>« An traou, er mezan, c'ha gwel<br/>Na glêo den o klem war ar stad (!)<br/>Gwaskomp-ta war an tû ma c'ha !<br/>Ma chomfont atao memeuz tra : »</p>    | <p>30<br/>Ma n'ije gret mad he zever.<br/>O tremen goude konseiller,<br/>Na vije ket an diveza,<br/>En lost al listen, vel ma oa,</p>                                      |
| <p>9<br/>Gwelomp petra glask Cloarec Paol,<br/>Goude ma vez er zac'h bep taol (!)<br/>Benn ma kred bouta c'hoaz he fri<br/>O terc'hel da gemeska pri :</p>      | <p>20 [kraz.<br/>Kement-man 'la sklaer d'an dud<br/>Eo prest d'orgwaska muioc'h c'hoaz ?<br/>Ar bec'h brasa d'an dud a boan.<br/>Vit ma chomfont dalc'hammad dindan !</p> | <p>31<br/>Nenze, kredabl, 'vel depute<br/>Ne raïo tam gwelloc'h ive ?<br/>M'ar d'eo red, a benn er gervel,<br/>Beza zod ha gwell dirastel.</p>                             |
| <p>10<br/>Pempgwech dustu klevit ? neuz gret<br/>Mez d'ar gwir Republikanet<br/>Ha bepred e talc'h ar paotr koz<br/>Da vont donoc'h don barz er foz !</p>       | <p>21<br/>Laret n'eo demp c'hoaz, ar pabor.<br/>E n'ije kleuzet ar voaz-vôr,<br/>Kalz donoc'h, beteg an Dour-Dû ?!<br/>C'hoarzet 'oa goabl dezan dustu !</p>              | <p>32<br/>Bep taol 'ne bac'had war e fri !<br/>Ha c'hoaz 'fell dezan maestroni ?<br/>Dre bennou diboel an Taol-man<br/>N'o deuz tam karante witan.</p>                     |
| <p>11<br/>Koulz en Havr' vel er Finister<br/>Zo laret dezan mont d'ar gear ?<br/>Ha chom eno pa vo eru,<br/>Pe mont da bourmen d'an Dour-Dû !</p>               | <p>22<br/>Milionou ! miliardet !<br/>Z'eu ezom da ze, mignonet ;<br/>Ha dre ma z'omp dija paour raz,<br/>Neuze 'vijemp laket en noaz !</p>                                | <p>33<br/>Neuze-ta c'hoaz, petra fell dè ?<br/>Met om derc'hel <i>mud</i> dindanne,<br/>Gant lezennou zod en pep stum,<br/>D'helloutrei <i>tout</i> d'ar memeuz rum!..</p> |

34

Met ni fell demp chom dishual.  
Ha pa ne dal mann d'ar re all (?)  
Leromp dê stard, distag ha krenn  
D'an traon Cloarec ! da virviken !

35

Gwir republikanet dalc'hammad,  
Rôomp dê prim eur gentel vad ?  
Ha pa z'ê deud ganemp Bourgot,  
Votomp a bez gantan tro-zro !

36

Bourgot 'zo den de n'em difen,  
A dû gant al labourerien ;  
Evel konseiller jeneral  
E talc'h dispont, he droad er pâ !

37

Penn-rener war borz Montroulez,  
N'euz diskwellet demp aliez  
Eo barek braz en pep affer  
D'en dibuni en bêr amzer.

38

Diskoliet 'neuz meur ha hini  
A gave dê oa hir ho fri (?)  
Rag enn dra 'ne fakat n'he benn  
Renk mont gantan tre d'ar pâ krenn !

39

Leun a dan ! hag en kreiz he vrud  
Pa na nê na bouzar na mud,  
E rofo demp skoazel dalc'hammad ;  
Neuz ked a riou d'he zaonlagad !

40

Nann ! 'neuz mertan gwestl d'on harpa  
O tont d'or c'helen war bep tra :  
Prefet na Ministr en harzo ;  
Red 'vo dê jilaou pa gomzo !

41

Ha komz a raio wit an holl ;  
Laezo ked an amzer da goll ;  
Da baotret kear, d'ar gwërijen  
A vo bepred eur gir zouten !

42

Distag deuz n'heb chaden hirie,  
Ma vez hanvet da zepute,  
A vo gwelet er Gambr, hon zur,  
Gant ar re 'zo krog mad er stur :

43

Pebeuz lorc'h o welet Bourgot  
En tal Boncour, Blum hag Herrio,  
O tifen droejou ar vro-man :  
Greomp an enor-ta dezan !

44

Holl da voti ? demp al lôre !  
En deiz m'omp eur sort depute,  
An traou c'hañ gwelloc'h penn-da-  
Wit falloc'h na nefont biken !

45

Gwelit, ne dal ked marc'hata,  
Red eo demp n'em rei d'ar gwella ?  
Pe chom dalc'hammad esklavourien :  
Skampomp gantan maez ar vouillen

46

Na chomomp ket pelloc'h war var ?  
Dreist holl labourerien douar :  
Evit difen reiz ho troejo  
Vo red mad voti gant Bourgot.

47

Ha ni komersantet bihan,  
Ni, pere 'm 'eum kement a boan  
O veva ken dindan ar bec'h,  
Votomp a vern gantan, dinec'h !

48

Goaz d'ar re d'eo ked votet ma :  
N'o deo ked da glem war ar stad ?  
Rag n'heb a bleg he chouk d'ar vaz  
Vo dornet atao goaz euz goaz.

49

A dreon ! falz republikanet ;  
Linz d'al labourerien, paotret.  
A zalc'h ar bed plom en he za.  
O tougen ar bec'h pounerra.

50

War zao ! red ê chench penn d'ar  
vaz ?  
O tiskwel sklaer, fell demp kaout  
c'hoaz  
Hom droejou gant hor frankizo ?  
O kass d'ar Gambr ar goas Bourgot !

**Vive Bourgot !**

**Ch. ROLLAND,**

Conseiller Municipal de Guerlesquin,

Délégué Cantonal,

Républicain Socialiste.

